

CHANSON NEVE

VAR SUJET

EUR BROMESE FERVANT HAC EUR SEPARASION

ETRE DAOU DEN IAOUANK

Var don ar *Fauz Promese*.

Prosternet e ma c'halon
N'ho prezans, Bretonet,
Vit goulén o c'hattansion
Eur momet en sekret :
Me disclerio en guirion
Eur bromesse fervant
Hac eur separation
Etre daou den iadouank.

Na fell ket din, er poent-man,
Dont d'abuzi paper;
Sujet avoalc'h a gavan
Hep asten ar malier.
Eur re-bennag marteze
A gemero an er
Da veprizan ma bue,
Dre ma e c'hesplicki skler.

N'on ket dign a droug sello,
Pa n'am anaveet ket,
Rac savantoc'h eyidon
A zo bet n'em leuyet
Ebars en laso Venus
Hac he mab Cupidon,
Pere a rent maleuruz,
Sivoas! meur a galon.

Me a zo eun den iadouank
Hac a meuz consente
Karout eur plac'h iadouank
Dign da vean karet;
Vit dirac ma daoulagad
Na meus remerket hini
Da gat eun er ken agreabl,
Herve ma fantazi.

Vel gant Doue inspiret,
Da ouel an Assomption,
Me a zo bet azeet
N'he c'hichen 'n eur pardon,
En parouz Pleudaniel,
Kichen eur goz iliz,
Eur plas devot a zantel,
Goude fin an ofiz.

Eno, var douar ar Verc'hez,
Me meuz bet remerket
He skiant hac e furnez
Ha memez e genet.
Me meuz groet reflection
la n'em sonjet erfat
a m'omp biken separation
it mar be ze d'he grat.

Abofter ma iadouankis
A neus ma arretet :
Bet a voan vit n'em diviz,
Ha na meuz ket kredet
Parlant dei e nep feson
Demeus ar garante
A zanten bars em c'halon
'N he c'hever en de-ze.

Nao miz omp bet, en guirion
Hep en em rancontri :
Deic'het ho c'hattansion,
Iadouankis, me ho suppli;
Aman e teu Cupidon,
Gant eun ardeur neve,
Da alumni 'n em c'halon
Elemancho ar garante.

Annons a riz d'ar plac'h-ze,
O vont d'eun assamble,
Penoz am boa bolante
Da gat he c'hamitie ;
Hac evit 'n em assuri
Deuz he fidelite,
A meus goulet diganti
Ober din promese.

AR PLAC'H

« Ma mignon, nimp zo iadouank
D'ober promeseon ;
Gant an disteran tourmant
A chanch hon ideou ;
Ma torfemp hon promese
Hac ober eun le parjur :
Me fel d'in en em bue
Cavet eur guir assur.

AR POTR.

Birviken an amzer fall
Na allo distrujan
Ar garante ken leal
Pehini a dougan ;
Mez me zo en dizfians
Demeus ho carante ;
Roet din an assurans
Vit ar rest hon bue.

AR PLAC'H.

Arsa eta, ma mignon,
Pa omp en plas herie,
Na vo ket dre draison
A rin dec'h promese :

Kemer a refomp vit test
Eun ayocat a Dreguer,
Rac hon c'halon so c'hoas fresk
Da chom hep culateur.

He dorn en em hini,
Prosternet d'an daoulin
Dirac sant Ervoan-Elouri,
Mab-henan Kervarzin,
En ilis ar Minihi,
An naontek a viz mae,
A prometjomp dimezi
Hon daou an eil d'eguille.

Secret voa hon promese,
Dirag eur bobl a leiz,
Pere dired en de-ze
A bep coste a Vreiz,
Da velet pen ho ayocat,
Dre guir devotion,
A douger var eur brancat
Bars er procession.

O solennite joauz
Evit eur bobl a fe ;
Biscoaz de ken evuruz
'N em boa cat em bue,
Zantout a ran ma c'halon
Vel beuet mesk ar joa :
Mes ret e cat separation
Rac an nöz a dosta.

AR POTR.

« Arsa, plac'h iadouank fidel,
Poent eo dispartian,
An heol zo arri izel :
Lekeet din breman
Eun termen da n'em gavet
Herve ho polante;
Rac pell a omp separet
An eil deuz eguille.

AR PLAC'H.

De eizvet ar Zacamant.
Bars en kær Landreguer,
Zo eun assamble charmant
Gand ar bobl ar c'hartier :
Mar be ze d'ho polante,
Hon daou n'imp ario
En Landreguer, en de-ze,
Goude ar gouspero.

AR POTR.

Var guement-ze, merc'h iauouank,
Me souet dec'h bonsoar,
Gant kals a agreamant
Me a delc'ho memoar:
D'an termen a c'heus fisset,
Credet, me 'n em gavo;
Na vefomp biken separet,
Vit ar rest hon deyo.

Pa arriis bars er gær,
A meuz bet ispliket
D'eun tad ha d'eur vamm dener
Ar bromese moa gret:
O daou a skuljont daero
O c'hanaveout ma chans.
Mes nôz eo pell a zo,
Repozomp en silans.

Kerkent e vaniz kousket,
Vel n'eur ravissamant,
Hac a meus bet remerket
Eur groaz kaer a arc'hant,
Ha varnei eur gurunen
Ornet gant greun perles,
Pozet en creiz eur blenen
En kichen ma mestres.

Dre spont on bet difunet;
Mez goelet meus erfet
Ma mestres bars 'n eun archet
Dirac ma daoulagat.
Bet on pell o vemorin
Var sujet kement-ze;
Mes rabet eo 'n em droublin
Vit kelou eun unvre.

Tostat a ra d'an termen
Pini m'amp asinet;
Mes goelet a ran eun den
O tonet d'am c'havet:
Roet neuz din eul lizer
A zo bordet en du;
Petra zo var ar paper,
Ret eo goelet dustu.

Al Lizer.

Salud dec'h, ma guir vignon,
C'hoaz eur vech, dre speret:
N'in ket d'an asinasion
A moa dec'h prometet.
Skoet on gant ar c'hlevet,
Me gred vit ar maro;
N'omp ket gand Doue choazet
Vit bean priejo.

Ma be a deui da gleusan
Var ben neubet amzer.
Vit ar veac'h divezan,
Adieu, ma servijer;
Pa eo Doue on separ,
Gras dimp da gaout chans,
Da 'n em velet bars er gloar
Evit hon aecompan.

AR POTR, out-han he unan.

O bleuen ken florissant,
M'ar koues d'an douar,
Tout ma oll agreamant
A chanco en glac'har;
Oll esperans ma deio,
Plijadur ma bue,
Assambles guenit a goeo
Da repos bars da ve.

Rabet eo disconzoli
Vit goelet al lizer,
An termen a so arri:
Varc'hoaz, en Landreguer,
Me a glevo abeurz mad
Ha guir eo kement-man:
Ar paper a lest lakat
Sort a guerer varnan.

Arri bars en Landreguer,
D'an termen asinet,
Vel ma sonnaz peder heur,
Me meus bet intentet
Eur plac'h iauouank o tremen
Laret d'he c'hamarades:
« Sell aze, mezi, eun den
Zo maro he vestres. »

Pognardet e ma c'halon
Ken a frimiz ma goad;
Vit clevet he declarasion,
E c'havansiz d'he c'hat:
« Respontet d'in, merc'h iauouank,
M'ar be ho madeles;
Me a c'houlouen humblamant
Penoz ra ma mestres. »

AR PLAC'H IAUOUANK.

Na servij ket, den iauouank,
Rei dec'h anoudegues;
C'houi a zo bet eun tirant
En andret ho mestres.
Hi, div r guele ar maro
A lekeas he foan
Da skrivan dec'h ar c'helo.
Mes c'heuz ket groet a van.

Me a moa e c'hasistet
Da skrivan al lizer;
Goude moa he fransiset
Ha roet d'ar faeuer.
Hi finisaz he bue
D'er goener d'abarde,
Ha herie deus ar beure
E diskennet 'n he be.

AR POTR.

Me moa kals a esperans
A voa fauz al lizer,
Pe groet gant tud a blezanz
Vit tremen ho amzer.
Mes ho comzo ken pikant
A boes var ma speret.
Me a lar dec'h, merc'h iauouank,
Kenavo 'r c'hentan goelet.

Couitat a riz an assamble,
Occupet ma speret;
Rac me en em vel hirie
Maleurus voar ar bed.
Ma mestres a zo maro
Ha me a chom breman
Da dipitan ma deio
Var he lerc'h er bed-man.

N'anvean ket ar matier
A galmfe ma glac'har;
Me na mo ken mes malheur
Biken var an douar,
Pa velan pegen iauouank
E c'he deut ar maro
D'am plonji bars en tourmant
Deus a greis ma joaio.

Servij ket din chom aman
Da isplikan kanvo
Rac na allan ket kanan
Ha goelan var eun dro.
Suplian a ran Doue,
Maro var ar C'halvar,
Ma recevo he c'hine
Ha n'imp oll en he gloar.

Groet gant PIERR RÉZON,
Goude bean resevet an declarasion
Digant eun den iauouank dezolet
Gant glac'har d'he vuon karet.

(Propriété de l'Éditeur.)



Lanhuon, en ti intanrez Ar Goffic, mouler-lerer.